

— 6 —

Dre ma meus cànjolet ebars en peb quartier ,
Ze' ra din lavarat an dra-ze a zo sclêr.

M'ho ped, potret yaouanc pere a rên er bed,
Ne fiit birvigen en preposiou merc'het :
Ar bromessaou caër a nij evel ar pell ,
Pa zônjer nebeuta a ya gant an avel.

Guëlet a rit amân dre pez seurt promesse
On me bet decevet gant ar femelen-ze :
Coulz ha me, yaouanqis, c'houi ell bea trompet ;
En pad ma oc'h abret, me ho ped dioüallet.

N'en em fiit qet re var ho tescadurez,
Balamour oc'h den brao ha carguet a furnez ;
Me am boa deus an eil ha demeus eguile ,
Hac a zo bet tromplet o re fiout enne.

Dre ma voan yaouanqis, allas! ne vouien qet
Ar sêçon da zisput gant godisserezet :
Ganto zellou charmanthac oc'homzou qen douç
E laqont eur galon da vea amoureux.

Rac-se, potret yaouanc, teulit eves ounte
Me ho ped da gredi gant peb seurt güirione :
Eur plac'h, mar dè penn scàn, a rayo ho maleur,
Mes, mar dè coant ha fur e rayo ho poneur.

CHANSON NEVEZ,

Var sujet eur Bassajerez hac eun den yaouanq.

Var eun ton nevez.

Pelec'h it u, passajerez, gant ho paguic vian ,
D'en em risca var ar môr evelse oc'h-unan?
Ho pisach hac ho qenet zo qer caër, qer brillant

— 7 —

Evel an egl beniguet a zo er firmamant.

Ha rac-se ta, Izabel, va douç, va c'harante,
Va ambarqit en ho pag, ma zin ganêc'h ive;
Va brassa contantamant ha va flijadurez
Eo naviga ganêc'h-u var ar môr assambles.

Petra ê ar c'homzou-ze oc'h eus lavaret din?
A ya bete va c'halon hac a ra anvi din?
C'houi marteze a zo deut evit va godissa,
Pe evit clasq ar fêçon da ellout vazrompla.

Me zo eur plac'hic yaouanc oajet a bemzecvla,
Hac a meus calz da zioüal n'arufe' dia netra,
Rac calz demeus a blac'h et a meus güelet trompet
O tonet da re fiout en comzou ar voaset.

C'houi ê certen ar fleuren eus an neve amzer
Ablij sur d'an dud yaouanc amân dre ar c'hartier;
Mes m'am be-me ar boneur da vea d'ho fantazi,
Me en em gafe eürus certen dreist pepini.

Me a zo eun den yaouanc a gar bea secret,
Ne get bet biscoas em sônj da c'hodissa merched;
M'ellân antren en ho craç hac en ho carante,
Me ho caro, va mestrez, gant peb fidelite.

An nep a deu re vuan da gredi d'ar voaset,
Lies plac'h a zo trompet siouas eus o c'hlêvet!
N'en dê get avoalc'h caret bea anaveet,
Rac ar voaset zo trompus alies d'ar merc'hed.

Eur plac'h a goll he enor zo atao maleürus;
Offanci a ra Doue, collet eo he vertus;
Mes diveat voar goude da zonet da vouela:
An enor, pa ve collet, n'eller mui da brena.

Ne get vit collhoc'h enor nac ho virjinite

— 8 —

E meus-mesur, plac'h yaouanc, qemeret liberte
 Da zont dac'houlen ouzoc'h a c'houivije contant
 Dazonet d'am ambarqi ebars ho patimant.

Marit din-me an enor da zont em batimant,
 Var ben-nebeut a amzer ni vo hon daou contant;
 Ni labouron nôs ha de qen a vezimp rentet
 Barser plaç va mestrezic oc'h eus dessign monet.

Avancit-ta, den yaouanc, hardi em batimant,
 Rac demeus ho prepozïou en em gavân contant;
 Ho talant hac ho sêçon hac ho comzou charmant
 A laç em c'halonic calz a gontantamant.

Benigomp-ta an instant eus hon ambarcamant:
 Me ho car, va zervicher, ganteur galon ardant,
 Hac am bezo evidoc'h pepseurt fidelite,
 Birviquen d'êc'h ne vancân qeit ma vin en bue,

Èleal, va mestrezic, n'oc'h eus netracollet;
 Me ho caro ive sur gant enor ha respet,
 Hac am bezo evidoc'h ar memes carante
 A oufec'h caout evidôn bete fin va bue.

Va mestrez qer, preparomp en treomp-ni afo
 Da gomanci da renviat entrezec hac hor bro
 Hac eno, pa vimp rentet, e vezimp assuret,
 Rac ar môra zo traitour; siout ennân n'aller qet.

Rac-se eta tad yaouanc, qent eguet finissa,
 Deut eta d'en em garout velma rê an daou-mâ,
 Hac ho pezo plijadur an eil gant eguile,
 Mar bevit mad assambles dre eur güir garante.

FIN.

E Montroulez, et iy LÉDAN, rue Pont-an-Iron-Varia.

